

# COLLOCOU

*FAMILIER*

ETRE UN DEN CURJUS

HAC UN DEN EXPERT,

VAR an abusou commun da bep  
stadou a velera ter etoues a bep  
seurt tud e Breis - isel, hac el  
lêsh - all.

*Dedet d'ar Vretonet, gant ur mignon  
æzo, hep intantion da choqi den  
particulier.*



E MONTROULEZ,

ti LÉDAN, Imprimer-Librer,

*Obscurum amicos, veritas odium parit.*

Cals a glevo an dra-màn o devezo regret,

Balamour d'ar virionez so ennànn disclérict :

An den clànn e zaoulagad n'ell qet sellet an de,

N'ac ar re a ve coupabl clévet ar virione.

# COLLOCOU

## FAMILIER ETRE UN DEN CURIUS HAC UN DEN EXPERT,

Var an abusou commun da bep  
Stadou a yeler a rer e toutes a bep  
seunt tud, e Breis-isell hac e  
leach'h-alt.

Dediet d'ar Vrelonnet, gant ur mighon  
dezo, hep intantion da choqi den  
espécialier.

Var un ton nevez, en eur répeti afo  
an eil vers.

BONJOUR, den coz ha venerabl,  
C'houi a glèvan a so capabl  
D'am instrui ha d'am c'helen  
Var ar pez ameus da c'houlen:

Sur c'hommis oun hac emeus urs  
 Da verqa tout qement djauts,  
 Qement abus ha goal gustum  
 En deus an düt a rum da rum.  
 Den yaouanq oun o tont er bet,  
 Gout ar c'hustumou ne rap qet;  
 G'hoqi a enev a beb seurt tud,  
 Qercouls re vras ha re vunut:  
 Houstet oc'h eus a beb seurt stat,  
 Tud a ilis, tud-jentil vat,  
 Tud a justic ha bourc'bisen,  
 Tud a studi marc'hadourien,  
 Artisanet. tud a vicher,  
 Mæstr ha mæstres ha servicher,  
 Cals a dud coz ha re yaouanq,  
 Qen dijentil, qen paysant;  
 Livirit din o c'hustum oll,  
 Evit m'o merqin var va roll,  
 Ma vezø great ur reglamant  
 Eus an oll jeneràlamant.

*An Den expert.*

Tout e cafet habec enno,  
 Hac int tud fur var o meno.

*An Den curius.*

Pe seurt habec, den ancien,  
 A g'ef an dud er veloyen?

*An Den expert.*

Ar veleyen a suposé  
 En em acqit eus o dever;  
 Pe int a ra, pe ne r'ont qet;  
**C**oms voar o stad so difenant  
 Occupet int oll deis ha nos  
 O caç ~~an~~ dud d'ar barados;  
 Mæs tud sot int, mar boe james,  
 Caç re all di, ha chom, er mes.

*An Den curius.*

Livirit-hu din, va den mat;  
 Hac abec so en ur prelat?

*An Den expert.*

Eus a escop nac a brelat  
 Ne oun neira' nemet pep mat;  
 Ar brincet, int eus an Ilis,  
 A so venerable e pep g'is  
 O doctrin hac o santelez  
 O rent henvel ous an elez;  
 Ha cousgoude ne ellont qet  
 Miret na vent drouc-preseg'ets  
 Ar veleyen, p'o c'hourijer,  
 Hac ar glöär p'o refuser,  
 Ne leveront nemeur a vat  
 Eus o escop bac o frelat.

*An Den curius.*

Nac ur person hac én a ell  
 Plijout dan dud eg'is ma fell?

*An Den expert.*

Eur person mat, hervez an dud,  
 Eo an hini en deus ar brud  
 Da veza libr gant e arc'bant,  
 Hep goulen digant paysant.  
 Mar car ober ber an ofic,  
 Sortial abret eus an ilis,  
 Rei da esa ha da zibri  
 Da gement den a ya d'e dy,  
 Lesel cabestr gant an dud fall,  
 Hep o gourdrous nac o zamall,  
 Rei liberte da yaouanqis  
 Da obatal en o divis:  
 Setu eno ar bersonet  
 A blich muia d'ar vretonet.  
 Mæs mar o deus eur guir berson,  
 Hac a fell deza gant ræson  
 Regli e dud, hac oblija  
 An dud fall d'ou emi gorija,  
 Hat o les pell hep absolen  
 Defot na reont pinijen,  
 Birviqen ennes ne g'eront.  
 Drouc ar person, a leyeront.

Dibaot hini en andure;  
Guell eo ganto caout ar c'hure;

*An Den curius.*

Mes ur person hac én a dle  
Fiziout e garg en e gure?

*An Den expert.*

Pe én a dle, pe na dle qet;  
Fiziet vez enna an denvet;  
Pa vez afer, da bep mare  
Cure bepret a renq bale.  
Personet so ne fizient qet  
Alc'huez o c'haou en o c'hureet;  
Hac a fis eno gouscoude  
Alc'huez ar sacr a vil'ene.

*An Den curius.*

Lixirit din, den ancien,  
Petra servich d'ar veleyen  
Mont da sarmon er c'hadoriou;  
Pa na fer van eus o c'homzou?

*An Den expert.*

Rar eo guelet eur sarmoner  
O convertissa eur pec'her;  
Rac nac an eil nac eg'ile  
Ne visont qet dat g'ementse.

Martese ar predictor  
Na glasq netra nemet enor;  
Nac ar pec'her, eus e gostez;  
Ne entez qet chenchi a vuez;  
Scouarn vousar ha vanite  
A goll an eil hac'eg'ile.

*An Den curius.*

Me gare caout eur c'hovessor,  
Hac am zrete eus ya humor;  
Hac et'b allen fisiout enna  
Patzaen da goves daveta.

*An Den expert.*

N'en deus cas dit pe da bios'  
Mont da gouta da fasiou,  
Rac n'en deus covessour et bet  
D'e benitant na deo secret.

*An Den curius.*

Secret int oll, cridi a rân,  
Mes re rust int, var a glevân,  
Rac rei a reont goual binijen,  
F'e refus crenn an absolven.

*An Den expert.*

Couls eo g'enén e leversez  
Ne fel qet dit moni da govez,

Nemet da lesel a raet  
 Da retorn arre d'ar pec'het;  
 Ma cases un den ignorant  
 Et'h absolve hep senchamant;  
 Hac a roe dit eur binijen  
 A ve soubiic dioc'k's da c'houlen;  
 Hennez ha te en em grae.  
 Hac oc'h taol g'enet e rae:  
 Mæs goude lein oc'h da esperit,  
 E coannies gant'an en ifern.

*Au Den curius.*

Aoun bras ameus. den ancien,  
 Na choqu ie ar veleyen;  
 Espeut-y en han-Doue,  
 Ha comzit-din eos ar roue.

*An Den expert.*

Dibant roue so er bed-màn,  
 Na g'ef a: bopl abec ennän,  
 Die ma tenqont olt fournissa  
 Archant ha tud die servicha;  
 Mes en aner e vurmuront  
 Hac hep ræson en em glément,  
 Cest ha madou emp d'ar roue,  
 Pa hor goulen hennet Doue.

*An Den curius.*

Gant aoun na gouste ho' puez,

Espernit mat ar touanez.  
 Livirit din ha difficult  
 Eo plijout da un dijentil ?

*An Den expert.*

An dud-jentil a respecteur,  
 Mes o c'hetet ne rear nemeur,  
 Abalamour cals anezo  
 So difficult plijout dezo.  
 Delicat int, prest e fachont,  
 Dibact a zen a excuzont,  
 Ha mat manquer a netra tout  
 D'o servicha hervez o gout,  
 Pelloc'h goude n'eo qet facil  
 Plijout ncmeur da zijentil.  
 Me oar eifat hervez ar bed  
 Enori noblañç a so dileet,  
 Mæs, mæs falise din o c'heleñ  
 Da soufr enor hep e c'houlen,  
 Hac o dese humilité  
 Assambles gant o c'halite.

*An Den curius.*

N'ec'h qet capapl, a c'hui habil,  
 Da rei qentel da zijentil;  
 List an noblañç en o divis,  
 Da comzit din eus ar justig;

Livirit din hac ur barner  
 A'ell manqout e ne zevez?

*An Den expert.*

Beza barner so danjerus  
 Da nep na d'eo qet vestuzus:  
 Eur barner mat, leal ha just,  
 Na die beza na drouc na rust:  
 Dioc'h ar justic e renq juji,  
 Ha rei e guir da bep-bini;  
 Barnerien so hac a ro prest  
 Setançou treus dre interest;  
 Aon rac tud nobl ha puissant;  
 Carantez re oc'h an arc'hant,  
 Cofadou guin ha cherou mat,  
 En tierz bras beza deut mat,  
 Presanichou great pe brometet,  
 Pe c'hoant da blyjout d'ar merc'het,  
 An traou-ze tout a so caos  
 Ma ze serret ar barados  
 Oc'h eals emeus a varnerien,  
 Dre ma reont gaou oc'h ar beorien;

*An Den turius.*

Ha na ell qet an avocat,  
 Pe proculer o pledi mat,  
 Contesti oc'h ar varnerien,  
 Ha difen mat caos ar beorien.

*An Den expert.*

Avocadet . proculerien,  
 Ne fis qet enno birviqem;  
 Dibaot avocat so er vero,  
 Ho c'honsultet nep à garo,  
 Na assurint da bep-bini  
 E c'houeso o procesi.  
 Ar proculer eus e gostez  
 A bromet e lacai evez,  
 Ha d'e gliant e lavaro :  
 Sur ar proces m'er gourez,  
 Evelse né vanqint jamez  
 Da boulja Yan en e broces ;  
 Rac a-unan ez int o daou  
 Evit e vestum en e graou.  
 An eil d'eg'ile a lavar :  
 Moyen en eus qement a gar,  
 Fvit asten ar patchimin.  
 Ha digaq an ed d'ar vilins  
 Leye en eus guerzec vero,  
 Ha mar qeromp loñ hor bezos  
 Chui avocat toñ esperanc,  
 Me proculer a rai avanc  
 Haç ar barnet a zeporto  
 Da reñ setanç qen a garo.  
 Dalchec vero Yan en proces,

Hep e lezel da zont er mes,  
 Harzet vero ha destumet  
 Evel lapo-is en ur gaouet  
 Ha birviqen er mes ne da  
 Endra chodmo pluenounta;  
 Dont a rai hep gallout nijal,  
 Debret vero ar pez ar dal,  
 Etut an devez eant al leve,  
 Loquer vero Yari da vale,  
 Rac hep arc'hant pe esperang  
 Ne fell da zio ober avanç,  
 Un den a les a so ur-sant  
 Mar gra ur pas hep c'huez arc'hant

*An Den curius.*

Nac ur gressier gant e siel,  
 Hac éu a gustum ober guell ?

*An Den expert.*

Sel leqeat gant ur gressier  
 A gustum ato cousteut qer;  
 Mar d'eo reqis caout tri deves  
 Da ober prisach a un danves,  
 Dibaot gressier mar deus nicunq  
 Eus a tri dez na ra sizun:  
 Menat paper eleach' feuillen  
 A implijo oll ven-da ben  
 Eyzt taout dioc'h an invauzor

Mui evit n'en deus ar minor.

*An Den curius.*

Ha ne dle qet ar c'hurator  
Mizet oc'h domach e viñor ?

*An Den expert.*

Ar c'hurator hac ar greffier  
So a-unan e peb affer ;  
Mar deus madeou, endia badint  
Divar gorre e labourins  
Qement camet na pas a rint  
C'ch ar minor tout e contint.  
An eil d'egile a efo ;  
Hac ar minor qez a baoe ;  
Ar c'hurator a yel e quer  
Evit e affer particulier,  
Hac a laqaï voar e venor  
Ez eo eas evit ar minor ;  
Deut an amser da renta cont.  
Ar c'hurator so prest ha pront ;  
Mui a vezò voar e venor,  
Evit na voa en invantor ;  
Greffierien ha curatoret  
A ruin cals a viñoret.

*An Den curius.*

Un den honest ha mignon dim

A c'hoult arc'hant e prest ouzia  
 Ha c'hui a gred em be affer  
 D'e oblija dirac noter ?

*An Den expert.*

Au noteret pell amzer so  
 So necesser ebars er vro,  
 Abalamour ma zeus tud fail'  
 Mui evit a so bet gouech-all.  
 En amzer gos arc'hant prestet  
 Var ar g'er e vezent rentet ;  
 Hog'en breman na elleur fisiout  
 Netra en den anez coll tout ;  
 Anes caout act dirac noter  
 James an dle ne deu d'ar gær,  
 Ha c'hoas emeus da lavaret,  
 Laqat eves oc'b' noteret ;  
 Cals anezo evit arc'hant  
 A drompl an dud bac int presant.  
 Bremâ e scrivont var ar paper  
 Control d'ar pez a brometer,  
 Ha te so facil da drompla.  
 Pa n'ouzout na len na scrifa ;  
 Pa n'effe ma vanqont d'o g'er,  
 Cals anezo ne ve affer  
 Nac a noter nac a serjant  
 Da ober dezo paea contant,

*An Den curiūs.*

Na gómit qet a serjantet,  
Rac ar re-ze-so tyrantet.

*An Den expert.*

Ar serjantet a hep amzer  
A so doug'et e pep carter;  
Danjeris int. ha pa' vefer  
O recordet en o c'hie ét,  
E lavarer e bér lângach;  
Ar re mà ya d'ober domachi.  
Mes petta dal la ariet g'er,  
Reteo o soufi p'e c'oustini qet.  
O channa rear, couls e p'oues,  
Rac d'o c'hroc ne varqut janies.  
Nep a se roc oc'h serjantez  
Sur ini na gall na chone qet  
Mar carem oll paea hon dle  
Biqen affer ouzo n'hor te:  
Nep na ra gaou ous den ebet  
Nen deus qet aoun rac serjantet.

*An Den curius.*

Evidon me ne gredan qet  
E ven dleour da zen ehet,  
Na biscoas ne rois dines  
Na da serjant na da noter;  
Moyen ameus honestamant,

M'am be yec'het e ven contant;  
 Mæs clanyus oun, ha ne oun qet  
 Pe ous piou goulen remet.

*An Den expert.*

Mar e c'heus c'hoant da veva pell  
 Ha caout yec'het bete mervel,  
 Chede amâ petra renques  
 Da observi het da vues:  
 Eus da vele qent ma sivi.  
 Passa, crancha ha c'hues da fri,  
 Qemer da sue ha qê buan  
 En eul lam cren a dost d'an tan.  
 Evit commarç en em g'empes,  
 Goualc'h da visach ha crib da ben,  
 Ha na les e fri netra leus;  
 Nac e taoulagat tam piceus;  
 Rinç net da visach ha da zent;  
 Ha netta tout eus à beb hent.  
 Abars e cors ma zaï netra,  
 Gra da zour ha qea da blegra;  
 Goude purji da vouzellou,  
 Guelc'h da zaouarn ha da c'benou;  
 Qemer, goude sevel mintin.  
 Un tam bata bac ul loum guin:  
 Sorti abret, mar be caer,  
 Glao pe avel, chom er g'ær.

Pa zistroï geude pourmen,  
 Laqa evez oc'h yenien;  
 Mar d'eo yen ha cris ar gouan,  
 Da gof oc'h taol, da g'ein d'an tan.  
 E peb amzer bes sourcius  
 Da bourvei bouet yachiedus,  
 Bêvin, boüad, lue, var ha maout,  
 A so mat, mat g'elles o c'haout:  
 Ar c'biq moc'h sali assetonet,  
 A lezi gant an aillonet:  
 Rac ar guella tam, pa goust'quer,  
 A do degout gant an amzer.  
 Pa ve da gorf boetëet mat,  
 Gra exercis ha lêz aplat;  
 Ha ne ra qet. laqa eves,  
 Daou repas bras en un deves.  
 Na zebr james sqebel tousseg,  
 Pesquet gregun nad ar melvet,  
 Na morilles na mousseron,  
 An traou-se tout so' ampoeson;  
 Viltançou int eus an douar,  
 A so noasus da neb o c'har.  
 Ef da vin pur da souben tom,  
 Ha pep hini dious da ezom.  
 Anes caout gout na zebr netra,  
 Dalc'h apetit bepret un dra:  
 Exces débri, exces efa,

Neus qet a gas pe meus a dia;  
 A ra da vui a dud mervel  
 Evit ne lazer er bresel.  
 Na zebr nemeur a voadeg'en;  
 Nebeutoc'h c'hoas a silzig'en;  
 Mes n'eus qet a gas pe da heur;  
 Eus a fourmach na zebr nemeur;  
 Pebr gant guinêq n'en deo qet mat  
 Da gonservi an estomac,  
 Hac ar butan a ra diez  
 Da g'emeret re alies.  
 Ar pesqet mat, da zeis vijel,  
 Ne ranquer qet o dilesek;  
 Mes a nep seurt eus a besqet  
 James en deiz na ra daou bret.  
 Ar viou fresq diouc'h an nos  
 Zo yac'hedus abars repcs,  
 Gant e neuyo ar veleyen  
 Ebars er vi var al lezen,  
 Pa o c'hivi poaset rano,  
 Ef oc'h da ben hep e vano.  
 Na zebr netra na ve poaset,  
 Rac an traou cris zo re galet  
 D'hon estomac da zijeri,  
 Ha ne ranquer qet o debri.  
 Rac-se ta, laqa eves pis  
 Na zebri re eus a froues cris.

Na saladen nemeur a dia;  
 Rac debri cals ne dal netra.  
 Pa zebri boued, qemer amzer;  
 Na zebr tam nemet dre voder,  
 Ma allo qent arre debri  
 Da estomac peur dijeri.  
 Ha mar fel dit caout plijadur  
 O tebri boued hervez natur,  
 Ro spaç d'an dent etre pep tam,  
 Abars creg'i a nevez flam.  
 Ar sucr so mat var al leas guen,  
 Gant an aval, gant ar beren,  
 Gant ar peches, gant ar sivi,  
 Gant ar framboes pa o c'hivi.  
 Ens a résin ma qerezan  
 Na lonq ar men nac ar c'hoc'hent  
 Nemet sec'het pe naon à pe,  
 Na zebr tam na ne ef banne.  
 N'en em garg re eus a netra,  
 Ispicial eus a vara.  
 Qercouls en ân hac er gouân,  
 Na zebr nemeur a dra da coan.  
 Eus à zoûben hac a ragout,  
 Debr un nebeut. pe lessi tout:  
 Goude da lein chom e repos,  
 Goude da goam qetz bete nos.  
 D'ar mintin qea d'ar meneziou,

D'an abardae d'an discoliou.

Na g'ez re vuan na re e'hourge,

Qe d'ar pas ha les ar redec:

Bete c'huez ec'h elles bale,

Nemet da rochet a dreusse,

Ha na souft qet var da groc'hem

Re a domder na yenien,

Ha sench linjeri alies,

Pe otramant e vezidies.

Goude mis ebrel, da fin eost,

Da dan ebet ne di qet tost;

Croc er voutail hac er veren,

Essoc'h vizi an drederen.

Goude mis eost bete mis me,

If ar guin gant nep er pae.

Goude creiz-deiz les ar c'housqet,

Deut anter-nos ne veilli qet;

Rac ne qet yac'hus beilla pell,

Sevel mintin a so cals guell.

James voar da g'eint na gousqui

Ha nebeutoc'h o'heas voar da fri:

Var da gosiez chom er guelè

Var an eii tu pe-eg'ile.

Mar e pez c'hoant d'en em voalc'hi,

Ebars en dour en em liqi;

Gant an dour yen guelc'h da zaouarn,

Non pas da ben, da ziouscouarn.

Mar des er bêign, sorti abret,  
 Chom pell en dour ne renquer qet;  
 Quendalc'h da dreid ha da ben tom;  
 Ha netra qen nec'heus ezom.  
 Ma ro da gof dit nep encres,  
 Na zale qet na di voar ves.  
 En em iing tout eus a péb hent  
 Hep miret dour avel na guentl.  
 Pa vez brumen a het an nos.  
 Dalc'h da dy vatnout serret clos,  
 Ha laqa evez voar an oli  
 Qc'h an erc'h, eol meurs, avel foll;  
 Var an deiz les ar c'housqet;  
 Chom e cador, na c'hourves qet.  
 Pa vez tomder e creiz an an,  
 Chom en diseal da heana,  
 Nac effort eñ bet mui na ri,  
 Nac o redec nac o c'hoari.  
 Les a gostez ar procesou,  
 Pep seurt disput ha qetelou;  
 Beo disourci hac hep chagrin,  
 Tristidig'ez a so malin.  
 Hac a so caos, hervez ar brud,  
 Da abreji buez an dud.  
 Ha mar fell dit beva eürus,  
 Deus da henti an dud joaüs,  
 Ha na implich, mar credes din;

Apotiger na medecin;  
 Rac mar qeres en' em regli  
 Qen en efa, qen en debili,  
 Qen en repos, qen en obet,  
 A vedecin ne c'heus assiet;  
 Rac peurvia an excessiou  
 A so caos d'bon oll c'blevejou;  
 Pe te so yac'b, pe te so clan,  
 Laqa evez da-vianan  
 Penaos an oll vedecinet,  
 Ar re vella tont a gaffet,  
 Ne reint qet d'an nep o c'halve  
 Remet ebet oc'h ar maro;  
 Rac qement in guilibunan,  
 E renqont merveil o-uanan,  
 N'ens medecin ebars er vio  
 Peb qelou mat d'an oll na ro,  
 Ha na bromet ober pare  
 Eus o clenvet pa vez dare;  
 Purji, goada, rei layamant  
 A faint d'an oll dioc'h o arc'hant;  
 Mæs gout penaos na pe da beur  
 Rei remejou, n'ouzopt nemeur;  
 Tud habil int voar o meno,  
 Mæs hasard eo fiziout enno.  
 Pe te vevo, pe te vatvo,  
 O laeamant o devezo;

Par consequant, mar credes din,  
Na fis biqen e medecin.

*An Den curius.*

Va bennos deoc'h, den ancien,  
C'hu oc'h eus roet din ar voyen  
Da gaout yec'het a la parfin,  
Hep caout affer a vedecin :  
Livirit din an abusou  
A gommetter en traficou.

*An Den expert.*

Dibaot eo ar varc'hadourez  
Na reat ganti affronterez,  
Pouesiou-scan ha goaleu ber,  
Musur bian ha guerza qer ;  
Voar digarez rei marc'hat mat ;  
Guerza traou fall cleac'h re vat,  
Chede eno pe seurt trafic  
A rent marc'hadour pinvidic ;  
Credit a reont, hac ar bed-oil  
A ya d'o stal evel tud foll.  
Allas ! an termen a zeu prese  
Ma renget paea an interest.  
Deut an termen da gaout arc'hant,  
Ret eo paea pe gaout serjant,  
Ha sot oc'h o prena netra,  
Ma n'oc'h eus arc'hant da baez ;

Pemar

Pe mar ec'heus, qê d'ur stal vat,  
 Ha digor franc da zaoulagat ;  
 Pe e vi tromplet gant da zen,  
 En eil fæçon pe en e ben.

*An Den curius.*

Peini ar guëlla a zaou unan,  
 Pe'r marc'hadour, pe'n arjisan ?

*An Den expert.*

Arabet è lavaret gaou ,  
 Rac d'en em heul e zeont o daou ;  
 Mar implijes artisanet ,  
 Laqa evez, p'e vi goanez ;  
 Ardou o deust en o micher  
 Da drompla mæstr ha servicher.  
 Maxim commun da artisan  
 Eo prometi da peb-unan  
 E rei oll qement a c'houlen ,  
 Endra vezò croc er veren ;  
 Efet ar guin hac ét er mès ,  
 E vi tromplet na mui na mes .  
 Cals anezo so ignorant  
 En o micher pe seneant ,  
 Evit toucha gant an esqen ,  
 Planta'n ados gant ar vesqen ,  
 Sqeï ha datc'ho a dol da dol  
 Pe gant buohal, pe gant morzel ;

Dressi, lemma an hostillou ;  
 A oar pep Yan ha peb Guillou ;  
 Hog'en tailla dioc'h ar musur ,  
 Ober labous fin bac assur ,  
 Dibaot hini er goar ober ,  
 Pe e laëro cals a amzer.

Artisanet mar greont marc'hat  
 A so nos ha deiz o labourat ;  
 Næs pa labouront dioc'h an deis ,  
 Eus a-bêvar e reont eis ,  
 Ha mar labouront dioc'h marc'hat ,  
 Dibaot e reont labour yât ;  
 Labourat fall ha coll amzer  
 A gustumont tout da ober.

*An Den curius.*

Un habit ameus da ober ,  
 Hac e ranqan caout qemener ;  
 Var a livirit ase din ,  
 Sur avoalc'h tromplet e vezin .

*An Den expert.*

Qemener ha qemeneres  
 A zrouc-prezeg'er alies ;  
 An dorn a groc o déus ato ,  
 Ha danjer ê fiziout enno .  
 Goat gorrec , laëres amzer ,  
 Cas brudou fal a gær da gær ,

Prena traou brao da dud yaônanq;  
 Hep gout d'o zat gant e arc'hant;  
 Dispen dillat a vez laëret,  
 Gant aon na vent anavezet;  
 Truffla digant servicherien  
 Qig pe aman, bleut pe vrignen;  
 Tamou etof, cùdennou neud  
 Da sevel-sial bep un nebeut;  
 A ra da gals, gant an amzer,  
 Eus a dailler dont da vencer.

*An Den curius.*

Pe c'hiat eta pe vea  
 A g'ivit-hu an direbecha?

*An Den expert.*

Me gonto deoc'h evit respont  
 Pe seurt bues a gunduont:  
 Guiaderes so un etat  
 A so qempen ha delicat;  
 Bemde c'houlou e vezont brao,  
 Ne renqont souft nac eol na glao;  
 O blam a rer o déus an tech  
 Da g'emeret lies a vech  
 Eus an aheven cùdennic.  
 Hac eus ar flevon ur branqic,  
 Evit sevel ul logoden  
 Da ober d'e c'hreg saë pe losten.

Hi a ene erfat e goas,  
 A lavar dezâ digaç c'hoas;  
 Evit ar pris ne d'ê qet quer,  
 Accord a reont e daou g'er,  
 Marc'hat mat en deus hac a ro,  
 Qement all arre en devezo,  
 Pa stevo un anter guiat,  
 E vezò touchet un tam mat  
 Da ober couef pe mouchouer,  
 Pe otramant colier da gouer;  
 C'hoas e reont meur a venniat  
 D'ar g'emeneres da vriat.  
**Goude e zaint da c'houlen cuden**  
 Da achui ar viaden;  
**Ar marc'hadour en deus caér clem:**  
 M'emeus aon enont n'am flem;  
 Mar lavar eo e viat stris,  
 E resproto : al laon so pis;  
 Mar za da glem an aneven,  
 E lavar e tor an neuden;  
 Pa e musur gant e goalen,  
 E c'hef te ver dioc'h an daou ben,  
 Ha mar car seller outi pis,  
 E velo enni neudennou bris,  
 Souillet goal great ar bevennou,  
 Perzies gollo différonou,  
 Neudec ha flasq eo al lian,

Gant an ascorn frotet bian  
 Mæs petra a dal e damal,  
 Couls e gaout eg'is un all;  
 Comzou en deus d'en em excus  
 Oc'h qement a deui d'e acus:  
 Arrabet eo redec ar brud,  
 Ret ê dézan fiziout en dud.

*An Den curius.*

Livirit din, dèn ancieu,  
 A c'houi voar doare an hostisien?

*An Den expert.*

Ya, rac alies, siouas din,  
 Emeus efet demeus a guin.  
 Mar em gredes, na fis james  
 Nac en hostis nac en hostises;  
 Mont d'an davarn a so ebat  
 D'an nep a gar ober cher vad.  
 Mes dont er mæs a so dies,  
 Nemet contant ve an hostises.  
 Pa antrei en un davarn,  
 Laqa evez d'en em c'houarn;  
 Rac mar e tremenes ar rouden,  
 E paï diou vech da souben;  
 An hostises evit commanç,  
 A raï dit cant reveranç.  
 Mar deus guin mat, lot a pezo  
 Qen a vezi santet mezo;

**Goude guin bas ha dour ennz**  
**A vezô roet dit da efa;**  
**Efet ar guin, debret ar c'hiq,**  
**E vezô contet ric a ric.**  
**Te a gont tri ha hi pêvar,**  
**Pea a ranqi en e lavar,**  
**Ha giêt e c'hont oll gant Catel,**  
**Ret eo caout arc'hant pe vantek.**  
**Un hostis hac un hostises.**  
**Mar efont guin re alies,**  
**A veler tout abars ar fin**  
**Oc'h efa dour varlerch ar guin.**  
**Cals anezo evit ar guir**  
**A ra cher vat hac ebat hir.**  
**Ma na reont gaou oc'h nep er paet**  
**Mæs dibaot eo an nep er grae,**  
**Oc'h Per, oc'h Pol e vescontont,**  
**Hac evelse en em disont;**  
**Az gabaret a zoug malheur**  
**Ha d'an hostis ha d'an efer;**  
**En em zaoni a ra an hostis,**  
**Hac an efer a bae ar mis.**

*An Den curius.*

**Livirit din, den venerabl,**  
**Hac ur Breton a ve capabl**  
**D'en em ganna en un arme**  
**Evel er g'ear gant ur banne?**

*An Den expert.*

**Ar Vretonet a Vreis-isel**

Ne g'eront qet mont d'ar bresel;  
 Tud vaillant int voar o meno;  
 Courach o deus betec eno.  
 Ne deus netra o disconsort  
 Evel rancout tenna d'ar sort;  
 Pa na c'houlenner nemet unan,  
 E cren an oll g'itibunan:  
 Guel è g'enén, eme'r Breton,  
 Beva pel ha beza poeltron,  
 Evit na dê mont en danjer  
 Hac hazardi da goll va fer.  
 Mæs tud sot int hac abuzet;  
 Ha caer o deus en um guzet,  
 Doat a raï sort qent pe goude  
 Ma ranqint mervel gouscoude,  
 Ha darn-vuya a zesertont,  
 Er galeou en em g'evont.

*An Den curius.*

Pe seurt abec a g'evet-hu  
 E'nep à g'em er habit du.  
 Hac a bretant mont en Iliq,  
 Da zoug'en chap ha supilis?

*An Den expert.*

Aon bras ameus calz anezo  
 Nemet goall fin n'o deveso.  
 Gas tud d'ar scol a so facil,

Mes o gouarn so dificil;  
 Evit beza êt d'ar scolach,  
 Ne maint qet e pen o beach.  
 Tud meaus int, dispign a reont,  
 Ha netra tout ne c'honezont.  
**Gouide ruina mâm ha tad.**  
 Un hazard eo mar gr'ont fin vat;  
**Ar yaouanqis a ra dezo**  
 En em deboch cals anezo.  
**Arc'hant ne vanq-qet da gloarec,**  
**O sonjal e vezô bêleg;**  
**Guisqet brao, cher vad a ra,**  
**N'en deveus defot a netra.**  
**Henti a raï tud libertin**  
**Hac e gustumo dioc'h ar guin;**  
**Mont da esa ha chom oc'h tol**  
**Epad ema'r re al er scol.**  
**Gouide repas mont da c'hoari,**  
**Pe da jestal gant merc'h Mari.**  
**Chede eno custum clouer**  
**Pa zeu arc'hant digaît couer;**  
**Latin a oar, bêleg vezô,**  
**Mæs netra tout ne dalvezo.**  
**Ne deus cloarec na scolaer,**  
**Ma carent tout studia caer,**  
**Pidi Doue voar o daoulin,**  
**Ha tec'hel diouc'h tud libertin,**

Ne raent fin vat hep dale pell;  
 Hac y hac o zud a ve vell;  
 Mar bel deboch en e studi,  
 Emeus a gant ne deu hini  
 Ne rai disenor d'an Ilis,  
 O toug'en camps ka supilis.

*An Den curius.*

Livirit din a ne gafet  
 Er c'houenchoù abec ebet.

*An Den expert.*

Bues ar menec'h zo ur stat  
 Admirabl dreist peb etat.  
 Ar menec'h gant Doue galvet,  
 Zo tud santel ha tud parset;  
 O buez vat, o santelez  
 O rent henvel ouc'h an ælez;  
 Qeit ha ma heuliont o reglen  
 Eus a vir galon pen-da-ben;  
 Mæs ar reglen en o zouez  
 Ne d'è qet ato ar pouez;  
 Elec'h chom chast en o ziezy;  
 O güeler o redec alies  
 Da viñta demezelet,  
 Tud jentil hac itronezet.  
 Pa zint rentet er c'houanchou  
 Ne glêver nemet discoursou,

**Etre menac'h ha merc'héjouz,**  
**Hed an deiz er parlouerou,**  
**Ha ne ell den cridi e Doue,**  
**Sujet an oll discoursou-se.**  
**Tremen a ran cals a draou all**  
**A reont sioas en ur g'estal;**  
**Pedomp Doue ma teuint brèmàm**  
**D'en em regli voar ar pez-màn.**

*An Den curius.*

**Livirit din ha nep disurs**  
**A gômeter en drede-urs?**  
**Me gare gout ha den eber**  
**A gaf abec er seurezet?**

*An Den expert.*

**An drede urs a so ur stad**  
**Gant an Ilis approuvet mat;**  
**Mæs cals a dud a so enni**  
**Hac a abus etus anezi.**  
**Seurezet so, ma zaent e pris**  
**Ne dalfent qet o habit gris;**  
**Hac ma telont netra ôchpen,**  
**Ne dalont qet o habit guen**  
**O daoulagat a sell isel,**  
**Hac o c'halon a zoug huel,**  
**Un dra a dileont en henor**  
**Nemet o zêor bac a humor.**

Gant habit guen an humilité  
 E cuzont o superbite ;  
 D'an oll int servichereset ,  
 Pa n'ellont beza mæstreset ;  
 Pasiadt int voar o meno ,  
 Mæs souffr netra ne fell dezo ;  
 Drouc comz a'reont a bep-unan ;  
 Nemet anezo - o - unan .  
 P'en em g'evont en ur bagat ,  
 Ez cont oll d'en em scandalat ,  
 Hac avisiou d'en em gribat ,  
 A doliou ivin bete'r goat .  
 Ne gomzan qet presantamant  
 Eus a nep so fur ha prudant ;  
 Parlant a ran e jeneral :  
 En em grafet nep en deus gal .

*An 'Den curius.*

Pe mont en urs , pe dimisi  
 Eo ar guella da bep-hini ?

*An Den expert.*

Ar c'hustum eo , dre interest ;  
 D'an dud yaouanq dimisi prest ;  
 Mæs dimisi prest so tromplius ,  
 Mont re yuan so danjerus .  
 Ha dreist pep tra amouroustet ;  
 A ra d'an dud beza tromplet ;

**A**rch'ant, g'enet ha lignez vras  
**E**n deveus tromplet meur a voas;  
**P**romessou great gant goaset;  
**E**n deus tromplet cals a blac'het.  
**T**ud re yaouanq, mar demesont,  
**G**oas pe vaoues mat ne reont,  
**Y**aouanq gant coz a ve cals goas,  
**L**aouen hirio ha trist varc'hoas  
**C**aret g'enet ne bad qet pell,  
**C**aret honestis a so guell.  
**P**lac'h difeçon, mar be-parfet,  
**A** verit mui heza caret  
**E**vit ar c'heanta so er vro,  
**M**ar car tout nep e c'haro.  
**T**e cousgoude so touellet  
**G**ant nep en deus mui a c'henet;  
**D**a vlam a rear, couls e lesel,  
**H**a cousgoude ne di qet pell.  
**N**'en em g'ef qet re divezat  
**E**n ty forn da c'houlen poasat,  
**C**aret out ha caret a res,  
**P**romessa sq , a leveres,  
**S**otoc'h a se out prometi,  
**H**a sotoc'h c'hoas vez dimizi,  
**M**a na c'heus clasqet peadra  
**H**ac hi ha te evit beva;  
**R**ac carantez ne bado qet,

Mar deu ezom goude euret :  
 Amouroustet d'an dud yaouanq  
 A so caos da vil nec'hamant.

*An Den curius.*

Na mar dint deza demezet ,  
 Netra oc'h eus-hu da lavaret ?

*An Den expert.*

Goas ebet ne dleffe james  
 Caout nep disput oc'h e vaoues,  
 Na fiziout re ne dle enni ,  
 Pe e vezoz tromplet ganti ;  
 Rac an ozac'h pa vez fachet ,  
 Mar lavar g'er oc'h e briet ,  
 A rei dezi mont e coler ,  
 Hac e respont gant an eil g'er.  
 Osac'h ebet ne dle james  
 Mont d'ar banquet hep e vaoues ,  
 Pe otramant , hep e voueso ,  
 Guell cher evinta en devo .  
 Eur vreg honest fur ha parfet ,  
 Na gar den nemet e friet .  
 Pa za etmeas e deus anqen ,  
 Pa zeu d'ar gær e vez laouen ;  
 Mæs er c'hontrol eur c'hreg gadal  
 A zoug friantis voar e zal ;  
 Pa zeu dirazi e friet ,

So guel ganti n'er guelfe qet.  
 Ozac'h fachet, pa zeu d'ar g'er,  
 Ar vreg ne dle lavaret g'er,  
 Mar be modest, ha tevel tout,  
 E zaï prest coler en e royt.  
 Têot greg so caos, pa e c'hanner,  
 Peur-liessa da vil miser,  
 Dibaot a zen so demezet,  
 Na enou prest gant e briet:  
 Daou zeiz hepqen en deus pep goas  
 Ha pep maoues plijadur vrás,  
 Ar c'hepta eo deiz an euret,  
 Hac an cil eo deiz an decet.  
 C'hoant dimisi, c'hoant beva pell  
 En deus pep Yan ha pep Catel;  
 Demeset int, pell e vevont,  
 Tout var o c'his e carent dont.

*An Den curius.*

Caret a raent goas ha maoues  
 Beza intaon pe intanves?

*An Den expert.*

Beza intaon hac intanves  
 A g'efont tout a so dies;  
 Pa vez maro pennadurer,  
 Ozac'h pe greg en tieg'ez,  
 Neuse intaon pe intanves,

Q'en na ver eat ar c'horf ermez ;  
 A layaro da bep-unan' :  
 Biqen james ne demezan' ;  
 Mæs enteret ar c'horf maro ,  
 Goude prest e dislavaro .  
 Pa vezò achu an eizvet ,  
 E current beza demezet ;  
 Martese e zint o-uan  
 Da bartant oc'h ar vasvalau ,  
 Mar bez diseves priedou .  
 Nep a chom beo gant ar madou ;  
 A guso lod eus ar moyen  
 Da frustra an heritourien ,  
 Hac et memes tra a rai  
 D'e bugale , mar deus hini ,  
 O custum cuzet madou ,  
 Neud ha ljen a sac'hadou ,  
 Evit berrat an invantor ,  
 Hac ober gaou oc'h ar minor ,  
 Dimisi a raïnt hep dale ,  
 Ha dont a rai c'hoas bugale ,  
 Ha divar goust ar map qenta ,  
 E fell mesur an diveza .

*An Den curius.*

Livirit din , ur servicher .  
 Penaos e vanq en e zevez ?

*An Den expert.*

Dirac ar mestr mevel a ya,  
 Pa ne guel e chom en e za;  
 Mates so fur dirac mästres,  
 Adren e c'hein e diodes;  
 Ar boueta, ar mad, gajou bras  
 A g'eront oll maoues ha goas,  
 Labourat ienn a mont buan,  
 Ne g'eront qet mug'et an tan.  
 Dibaot na mates na mevel  
 En un ty mat e chomo pell,  
 Na roint oll sujet da zoueti  
 Ez eus eno guen dimizi.  
 Cher vad a reont, ne goust netra,  
 Nac an dibri nac an efa:  
 Eas è cundai amouroustet  
 Divar goust mestr ha mestreset;  
 Mevel, mates a gar an danç  
 D'an tiez mat a zoug goal chang,  
 Mevel yaouanc a gar ar guin,  
 Nep a fis eunâ ne qet fin;  
 Mates friant ha dibarfet,  
 Hac a sell re oc'h ar goaset,  
 A ruino, hep dale pell,  
 Qercouls ar mestr hac ar mevel;  
 Lipouserres, cher vat atao,  
 Ha prena bep bloaz dillat brio

Dibri mintin , cousget abret  
 Car ber amzer etre bep pret,  
 So maxim mevel ha mates ,  
 O teport mezur paourentes.

*An Den curius.*

Armæstr eta hac ar væstres  
 Ha ne fachont- hi james ?

*An Den expert.*

Dibaot hini a ell tevel  
 Nac oc'h mates nac oc'h mevel  
 Ha cousgoude ne vezont qet  
 O re goudrous guell servichet.  
 Natur an oll bihan ha bras ,  
 E cassât an oll dud egas :  
 Mar bez egasset ur mevel ,  
 Gant bér labour e vezo pel ;  
 Mar be egasset ar vates ,  
 Eus un heur e rai deves ,  
 Pe otramanter a raint labour fall  
 Evit mont da ur servich all .  
 En daou gostes e vurmuront ,  
 Ha netra erfat ne reont ,  
 Ha beza gourdrôuset oc'hpen  
 A ra da veur a servicherien  
 Laéres o mestr , pe coll amzer  
 Nep a ra comananchou caës

**A** gustum ato mervel laërt  
**Arc'hant**, peoc'h ha boeta mat  
**A** ra d'an oll dud labourat ;  
**Ma** na reont qet oc'h ar pris-se,  
**E** caout re o liberte ,  
**O** c'hass ermeas hac o fêa ,  
**Hep** o goûdrous eo ar guella.

*An Den curius.*

Estonet bras en em gafan  
**Gant** ar c'bustum so er vro-mam  
**Ne** deus itron na bourc'hises  
**Na** g'emeront oll mag'eres  
**Evit** mesur o bugale ,  
**Qen** na vezont deut da vale ;  
**Ha** cousgoude n'en deus hini -  
**N'en** deus Doue roet desi  
**Diou** vron ha leas evit mezur  
**Ha** sustenti e c'hrouadur.

*An Den expert.*

Un abus bras eo qemense ;  
**Anez** ma ve necessite ;  
**Ar** c'husum cris ha dinatur  
**E** da vam g'enel crouadur ,  
**Hac** e briva neuse souden  
**Eus** ar pez e deus d'e souten ;  
**E** vagadurez naturel

Eo læz e vam da ur bug'el ;  
 Hac injustiç a rēr ountā ,  
 Oc'h e briva eus aneza .  
 Mervel a ra cals a vug'el  
 E defot e læz naturel ;  
 Ha rac-se e vanq alies  
 An itron hac ar vag'etes :  
 Ar c'henta vanq d'e c'hrouadur ;  
 O caret re e fljadur :  
 Ar vag'eres evit arc'hant  
 A abandon un innoçant ,  
 Hac en les da veza debil  
 Evit mezur map dijentil .  
 Meur a itron ameus guelet  
 O mezur chaç , anevatet ,  
 Hac o laqê var o barlen  
 Da zibri lod eus o souben ;  
 A boc dezo , o briata ,  
 Hac a ro dezo an tam qenta ;  
 O c'hy ganto en o guele ,  
 En dishenor d'o c'halite ,  
 Ha gouscoude ne vagfent qet  
 Ur bug'el qês o deus ganet .  
 Ha ne dint-hy qet dinatur .  
 Mezur qy eleac'h crouadur ?  
 Cals a grimou a rear ouc'hpea  
 Abalamour d'ar vagaden ,

Eus a bere ne gomzan qet  
 Gant aon ha mez o lavaret:  
 Ne deus mag'er na mag'eres  
 Na fasiont re alies.

*An Den curius.*

Livirit din , ur paysant  
 Hac en a hel beva contant ?

*An Den expert.*

Ur paysant a hel beva ,  
 Caout da zibri ha da efa .  
 Hep caout ezom eus a varqis ,  
 A zijentil nac a vourc'his .  
 N'en deffe ezom eus a netra ,  
 Ma talc'he oll qement a ra ;  
 Mæs destumet e oll hedou ,  
 Hadet e liors ; hac e barcou ,  
 Qen alies e goul ounta .  
 Ne chom qasi netra ganta .  
 Ar rouanes gant o zaillou ,  
 An dud-jentil gant o fermou ,  
 Ar personet gant o deogou ,  
 Beleg , menec'h gant o c'hestou ,  
 Servicherien gant o gajou ,  
 Medecinet gant remejou ,  
 Tud a justic gant procesou ,  
 Hac ar beorieh gant ezomou ,

Mibien caër gant o argoulou ;  
 Milinerien gant o gobrou,  
 Ar serjantet gant o misou :  
 Hac al laëron gant o ardou ,  
 Oll e pillont ar paysant ,  
 Ha d'an oll e tournis arc'hant ;  
 Ha consgoude en disprisont ,  
 Hac hep réson er goaldrêtont ;  
 Rac n'en deus tud voar an douar ,  
 Ar bed oll er c'hred hac er goar ,  
 En em vir couls oc'h ar pec'het ,  
 Evel ma ra paysantet.

*An Den curius.*

Darbét ed deomp , den ancien ,  
 Ancquat ar vilinerien ,  
 Hac ar bed oll g'itibunani  
 A renq o c'haout bras ha bian :  
 Hac én a so den er c'hanton ,  
 O drouc-preseg'e gant réson ?

*An Den expert.*

Milinerien, dreist an oll dud ,  
 A bep amzer o deus goal vrut ,  
 Ha sujet int' d'an teodadou  
 Abalamour d'ar sac'hadou .  
 O blam a rear n'ellont qet  
 En em souten hep laëres ed .

Ferm vras o deus, cher vad a reont  
 Gant o madou . n'ouzont ma zeont,  
 Re e qemer, eme couer ,  
 Eleac'b scudel gant ar c'hrouer ;  
 Ar groag'es ques ne g'evont son  
 Nac er pot ar jognac nac ér forn,  
 Hac evelse e criont caërl  
 Et eo va sac'hat gant al laërl  
 Ar miliner a sell a dreus ,  
 Hac a lavar : va guir a meus ;  
 Oblijet oc'h . va Jaqeta ,  
 Da zont d'am milin da vala ,  
 Ha c'houi oc'heus un arves fall  
 Da gaç an anter da lec'b all ,  
 Hac evelse ec'h allan reis  
 Elec'b c'hoec'h qemeret eis.  
 Ne râ qet erfat ar merer  
 Miret e guir oc'h miliner ?  
 Hac ur miliner a ra gaou  
 Eleac'h upan qemeret daou ?  
 Hac evelse par consequant ,  
 Ez int daou laërl ha drouc contant .  
 Ma livirin gouscoude franc  
 D'am avis pehini so vanc :  
 D'ar meiller ur pen e ruin  
 E beza sujet d'ar vilin ,  
 Penaos benac e labouro ,

Ne vanqo bijen n'hø tromplo:  
 Ma renq fournissa dioc'h ar pouez ;  
 E laqaïdour en e zouez,  
 Goude e stlapo het-a-het  
 Ar bleut voar an douar so glebs  
 Bez' ezeus milinerien all  
 A vir ed mat ha raï ed fall,  
 Goude e zaint gant o ed mat  
 D'er guerza deoc'h er marc'hâat.  
 Pa g'emeron diou scudellat  
 E lec'h unan a ur sac'hat  
 E custumont qemesq usien  
 Ganto evit talvout brignen.  
 Peufvuiâ o ðeus ar gris  
 Elec'h ar bleut da g'enier gris,  
 Evit contanii ar grag'es,  
 Qen na vezo eat en tamoes.  
 Petra servich dezo facha.  
 Cas a raïnt dezo pe paea ;  
 An nep a renq paea arval,  
 A ra daou goðr pe areval,  
 Fiziout ennan ar guella dit,  
 Hac e ri guell cals da brofit.

FIN.

AVIS

D'AL LENNER

CAOUT a r   e ti L  DAN;  
Imprimer ha Librer, e ru ar Vur  
e Montroulez, a b  p seurt Rimou,  
Chansoniou, Cantiq  u, Gu  rzu  
ha leoriou brezoneg.

Guerza a ra ive leoriou ofig  
ha re all, plun, liou, paper, etc.

